

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs round

Dek mestrezig

Dek mestrezig am eus bet,
dont a ray 'n amzer d'ho karet.
Hag o nav ez int marvet,
o ya dont e ra,
dont a ray 'n amzer va mestrezig, dont a ray 'n amzer d'ho karet.

Da gentan em 'oa bet unan,
Honnezh 'yoa pilet an tan.

Goude-se em 'oa bet div,
Honnezh 'oa marvet gant ar riv.

Goude-se em 'oa bet teir,
Honnezh a yoa frapad re hir.

Goude-se em 'oa bet peder,
Honnezh a yoa frapad re verr.

Goude-se em 'oa bet pemp,
Honnezh-se a yoa unan simpl.

Goude-se em 'oa bet c'hwec'h,
Honnezh chome atav war-lerc'h.

Goude-se em 'oa bet seizh,
Honnezh a yoa aet gant ar bleiz.

Goude-se em 'oa bet eizh,
Honnezh-se a yoa unan reizh.

Goude-se em 'oa bet nav,
Honnezh a lavare c'hoari atav.

Goude-se em 'oa bet dek,
Honnezh a yoa bet va gwreg.